

Kantik Sant Iann - Vadezour

(pour Saint-Vougay)

DISKAN

Embanner braz ar binijen,
 Hirio selaouit hor peden. — Sant Iann —
 Karet oc'h bet gant Hor Zalver ;
 C'hui zo profet, c'hui zo merzer.

1

Etoucz bugale ar merc'hed
 Biskoaz⁺ n'euz bet kavet + *nikun*
 A ve brasoc'h eget sant Iann ;
 Jezuz hen lavar he-unan.

2

Iaouankik c'hoaz el lec'hioù gouez
 Moc'h bet kaset gant ann Elez — Sant Iann —
 Pell diouz ann dud, tost da Zoue ;
 C'hui jomaz pur, korf hag ene.

3

Na rust eo bet he binijen,
 Kroc'hen kanval eun he gerc'hen ;
 Biskoaz na guin, na tamm bara :
 Grizioù c'hoero evit beva.

Dre nerz ho mouez, eil Eliaz,
 Ann dezert oll a dregernaz, — Sant Iann —
 Kalz pec'herien deuz d'ar Jourdin
 O skei gant keuz var ho feultrin.

Setu Jezuz, Salver ar bed,
 O tont da veza badezet :
 Enn eur greua, Iann-Vadezour
 Var benn he vestr a skuill ann dour.

Ma krenit dirak mestr ar bed,
 Dirak ann dud ne grenit ket, — Sant Iann —
 Tavit, tavit, tud digaloun,
 Ar profet braz n'oar ket kaout aoun.

« Selaou, Herodez, te ra fall
 « Derc'hel ganez pried eunn all ;
 « Varnhot, varnhi, hag eb dale
 « E pouezo dourn justis Doue. »

Eur c'hreg gant he merc'h danserez
 A reaz deoc'h-hu koll ho puez, — Sant Iann —
 Malloz d'ann danz ha d'ar visou
 Goad hag ifern euz ho zeuliou !

He benn santel zo digaset
 Var eur plat e kreiz ar banket :
 Sell euz penn Iann, Herodez kriz,
 Ar penn-ze a veli noz-deiz !

Mervel zo berr, dir ar c'hleze
 D'ar merzer eo alc'houez ann Ee,
 Na c'hui zo kaer e lez hon Tad,
 Badezour badezet er goad !

Aman gueichall kaera chapel
 A c'houdore an dud fidel, — Sant Iann —
 Diredet euz a dro var dro
 Skuiz maro, guir, kalz anezho.

Ar skuisder-ze neo ket paduz
 Enn ho kichen, mignon Jezuz. — Sant Iann —
 Dour ho feunteun dorr ar zec'hed,
 D'ann izili ro ar iec'hed.

A veac'h ho pardon zo digor
 Mar deo rentet tud ann Arvor ; — Sant Iann —
 Ho feunteun zo gantho kelc'hed ;
 Daoulinet oll, ho fenn stouet.

14

Daou zervez e veler savet
Varzuennoc'h mil breac'h goalc'het, — Sant Iann —
Gant ann dour euz ann eienen ;
Lod all er skuill enn ho c'herc'hen.

15

Pep pelerin goude raktal
A gas ar chapelet d'he dal, — Sant Iann —
Hag a ra teir zro d'ho chapel
'Vit obten he vennad santel.

16

Guelit : ne baouez d'ho pedi ;
Badezour eüruz ar Messi, — Sant Iann —
Varnhan grit eur zell a druez ;
Enn han' Doue, klevit he vouez.

17

Skuillit bennoz var bephini
Zo bet hirio ouz o meuli ; — Sant Iann —
Enn ho buez, var ho maro,
Kemerit soursi anezho.

18

Ma zeo dalc'het er Purgator,
Da vugel Sant-Vouga roït skor, — Sant Iann —
'Vit ma nijo pur ha santel,
Varzu ann env, a denn-askell.

Brest. — Imprimerie rue Kléber, 11.

*par M. Guillou
Tennaric'h —
adapté et complété
par M. Moenneke, docteur recteur
de St-Vougay —
aujourd'hui à Brest — 1911*